


DISKAN :

Introun Varia a Lorett,
Guerc'hez galloudus, beniget !
Roït deomp, e haon Doue,
Yec'het ar c'horf hag an ene.

IMPRIMATUR :

Corisop., die Martii 29a 1900.

CORRIGOU, Vic. gen.



8N1-4-011

Rédéné

KANTIK

INTROUN - VARIA LORETT

Var ton Rumengol.

1

Ia Rédéné ! pell amzer zo,
C'hui vel perc'hirin a dro var dro :
A bep tu doc'h zo Sænt breudet,
Mes ganoc'h eman Introun Lorett.

DISKAN :

Introun Varia a Lorett,
Guerc'hez galloudus beniget !
Roït deomp, e haon Doue,
Yec'het ar c'horf hag an ene.

2

Tud a Leon, it d'ar Folgoat,
Eno zo eur Vam dous ha mad :
C'hui ive, tud Bro Ellé,
A gavo eur Vam e Rédéné.

3

Breizis, it da Rumengol,
Saludit Mari, remed-oll !
Eus peb poan ha peb clenveñt,
Sicour ro ive Introun Lorett.

4

Da Lourd e tired oll Bro-C'hall,
E mesk an oll boblou aral :
E Rédéné, er Finister,
Mari, c'hui peuz ive eun Auter.

5

E Nazareth oac'h o pedi,
Pa deuas an Æl d'Ho saludi...
O Ty bihan, guet an Ælet,
Dreist an oabl zo bet douget.

6

Ælet santel, emen it-hu ?
O c'heskel digor e bep tu :
Mont a reomp var gern Sinaï,
Da gass Ty disteric Mari.

7

E kreiz ar gurun hag an tan,
Doue roaz eno e lezen splan !
Ælet o kana. Ty Nazareth,
Eno ive zo diskennet.

8

Ælet santel, var Sinaï,
Eus Rom pell eman Ty Mari :
Eus Sinaï var gern Lorett,
Ælet ! adarre en douget.

9

O burzud ! dreist an oll dispar,
Hag a c'hell gwelet nep a gar :
Ty Mari, Guerc'hez Nazareth,
Zo a bez en ilis Lorett....

10

O Mari, Guerc'hiez santel,
Saludet guet an Æl Gabriel :
Dreizoc'h Tri Ferson en Drindet,
A zo madelez oll berpet.

11

En illis Lourd grit burzudou,
E Rumengol grit miraclou :
Er Folgoat bezit dous ha mad,
Var Rédéné o taoulagad !!!

12

Feiz, Esperans, Carante,
Dreist peb tra roñt kement-se !
Gant kement-se, n'hi vo eñrus,
Drei-ze n'hi vo ato da Jesus.